



Priz Per Jakez Heliaz e brezhoneg

Tri levrioù mat embannet gant Al Liamm e oa bet dibabet ganeomp er bloaz-mañ evit ar priz Per Jakez Heliaz 2018.

Park Balan, ur romant daoubenn gwenn ha du, fromus ha skrijus ivez skrivet gant Riwal Huon,




Straed ar sec'hedien ha koñchennou all Istorioù fentus skrivet gant Yann Guillamot,



ha ***Du evel an noz liesliv*** davenellou skrivet gant Malo Bouëssel du Bourg.

Riwal Huon ha Yann Guillamot zo lakaet e memes rank, an eil blas

Ar priz kentañ evit Malo du Bourg



Roet e oa ar

Priz Kentañ Per Jakez Helias

da

Malo Bouëssel du Bourg

evit e levr danevellou

Du evel an noz liesliv.

En daouzek danevell a ra kont deus tud erruet e kroashent o buhez :

« ur sterner difredet o folliñ,
ur c'higer deuet da vezañ debrer-linad,
ur vaouez kozh boureviet gant he merc'h-kaer,
ur paotr o c'hoari floc'h daoust d'e oad kaset mat,
ur c'hrennard a c'hounez e damm kreun o kontañ muntroù war ar rouedad... »

Gant ur meudad fent ha kalz a deneridigezh e liv Malo Bouëssel du Bourg an aozer gwalldroioù e dudenoù.

Istorioù ar mare-mañ ha du a-wechoù en ur bed foll a-wechoù.

Danevellou da lenn,
Ur levr a vez kavet ar stalioù embannadurioù Al Liamm hag e tier levrioù.

Ma peus c'hoant da c'houzout muoc'h titourioù diwar benn Malo Bouëssel du Bourg, tu peus da vont war lec'hienn Bretagne5.bzh, e podcastoù Breizh penn da benn.